

SANT YAN DIARHENN

— DISKAN —

*Diredom oll a dro var dro
Da enori Sant Yann or bro,
Tenzor kuzet war an douar
En env brema leun a hloar.*

I

E Sant Vouga ez eo ganet
Hag ugent vloaz e neus bevet
Heb klask morse digand an dud
Gounid netra, madou na brud.

II

Kizella mean, ober kroaziou
Hag o zeyel war an hentchou
Setu aze micher genta
Ar Santig du e Sant Vouga.

III

Kaerra kroaz greet gantan
Eo an hini a reas ennan
En eur veza kory hag ene
Skeudenn veo an Den-Doue.

IV

Pa-oe beleg, Eskob Roazon
E Sant Gregor henn anv person
Evid an oll karantezuz
Ar vad a ra 'zo burzuduz.

V

Desket e oa, leun a furnez
Hag helavar en on diou yez,
Doujans Doue, er halonou
A ziwane war e gomzou.

VI

Met e galon a glask hebken
Ar baourentez, ar binijenn,
Evit beva 'vel an Elez
E wiskas sae urz Sant Fransez.

VII

Eno morse ar binijenn
Ne vir outan beza laouen,
Deski ra dem beva eüruz
Gant ene glan e poan grevuz.

VIII

Dougen a ra gouriz garo
'Vid e vrouda beteg ar beo
Hag an dilhad ar re falla
Eo evitan a gav gwella.



IX

E peb amzer, hed ar bloaz,
E kerz en hent, e dreid noaz
Kignet leun-wad hag awechou
Treuzet zoken gand an tachou.

X

E touez leaned, kouent Kemper,
E ra bepred gwasa micher,
Kestall war yun epad an deiz
Evid maga peorien eleiz.

XI

Pled a gemer euz an dud lor
Ken reuzeudig ha ken tohor !
Netra enno ne gav euzus
Pa zonzj ez int membrou Jezuz.

XII

N'eus ket e bar evid senti
Rei skoazell da beb hini,
Lakad ar peoh en eneou
Koulz dre e skwer hag e gomzou.

XIII

Epad ma ped e vev en Env,
Ne wel, ne glev nemed Doue,
Ken beuzet eo er garantez
Ma ra avid'an arhelez.

XIV

Mervel a -ra o rei Noutenn
D'an dud taget gand ar vosenn,
D'ar baradoz e ya dioustu ;
Pegen braz sant eo Santig Du !.

XV

Evid pedi en dro d'e vez
E tiredas ar bobl a bez ;
Ar burzudou greet eno
A gendalh hoaz en deiz hirio.

XVI

Enorom mad dre or pedenn
E relegou hag e skeudenn
Ha goulennom gand e koazell
Buhéz kristen, maro santel.

An Aotrou MEVEL
Person Guikourvest

Imprimatur : Quimper le 22 Février 1956

J. CADIOU
Vicaire Général